

BRUD

MEVEZ

Marcel Divanac'h

Fillor an Diaoul

Kinniget gant Gilles Goyat

Embannet gand Brud Nevez, 2 bis ru Prof. Chrétien 29200 Brest.
© Brud Nevez.

Marcel Divanac'h

(1908-1978)

E Leskonil, komun Pornaleg, e oa bet ganet Marcel Divanac'h, e 1908. Pesketêr e oa e dad, Korantin. Mond a reas da skol Leskonil, goude da skolaj Konk-Kerne ha da Skol Normal Gemper. Mestr-skol e oe e Penmarc'h euz 1927 da 1938, ha goude e Sant-Yann-Drolimon, beteg 1960. Neuze e yeas da Vrest, ha kelenn a reas e skol publik Kerinou. Marvet e 1978, eo bet beziet en e barrez henidig. E ano zo bet lakeet d'eur blasenn euz borh Sant-Yann, hag a zo anvet « Plasenn M. Divanac'h, mestr-skol ».

En e yaouankiz e-noa bet tro da gleved kalz kontadennoù gand Alain-Guillaume Larnicol (1853-1921), meiller en eur veill-avel e borh Pornaleg da genta, ha goude e Menez-Veill, Leskonil, azaleg kreiz ar bloaveziou 1870, pa oa ar porz o kreski buan. Ne oa ganet Lan Larnikol nemed 16 vloaz war-

lerh Marharid Fulup (1837-1909), hag evelti e ouie kontaden-nou hir, evel an hini a vo lennet amañ, a zo par d'ar re das-tumet e bro-Dreger gand Fañch an Uhel ; med ar stummou euz su bro Gerne n'int ket ken anavezet, pell alese.

E 1951 eh embannas Marcel Divanac'h e genta dastu-madenn, *Contes du Vieux Meunier Breton*, bet klevet gantañ e Leskonil war-dro 1914, anvet gantañ e brezoneg « Koñchen-nou ar meiller kouz » ha lakeet e galleg penn-da-benn gantañ. Diou levrenn all a zeuas er-mêz e 1957 ha 1968, e galleg ive, med enno eun nebeud geriou ha frazennoù brezoneg. Seiz leor all, (eñvorennoù, daou bez-c'hoari lakeet gantañ e brezoneg diwar Molière, eur romant, e vennoziou-eñ diwar-benn 5 000 ano famill...) a oe embannet gantañ war e gont e-unan. War ar gelaouenn Brud n^m 2¹ e heller lenn eur goñchenn verr gantañ, « Tomazig ha Mahi », ar stumm galleg anezi o veza en e eil levrenn kontadennoù, embannet er memez bloavez. A-drugarez da Vikael Madeg e heller c'hoaz klevet M. Divanac'h o konta c'hweh euz e goñchennoù e brezoneg ; enrollet e oa bet gantañ e Brest war-dro 1975, hag embannet gand Dastum e 1988².

Adembannet ez eus bet nevez zo eul lodenn vad euz e gon-tadennoù e galleg : *Contes de Bretagne*, ha *Contes du Vieux Meunier Breton*³. N'int ket renket er memez urz hag en emban-naduriou kenta, avad. En desped d'an titr heñvel-mik, ne gaver ket el leor diweza-mañ tre ar memez kontadennoù hag e hini 1951.

E-kerz ar bloaveziou 1950 moarvad, e-noa Marcel Diva-nac'h roet da Armand Keravel daou gaier skol, warno « Fillor an Diaoul », an destenn vrezoneg euz kontadenn genta e levrenn genta. Daoust hag-eñ e oa bet kaoz d'he embann ?

1. Diskar-amzer 1957, p. 87.

2. Komz, n^m 3, eur hasedig gand eul leorig 54 p. da heul.

3. Royer, 1999 hag Alice Lyner, 2013.

Marteze a-walh. Eur stumm eo euz ar gontadenn-skwer « An dehadenn hud », dezi an niverenn 313 e katalog Aarne-Thompson-Uther, hag a ginnig eur renkadur etrevroadel euz ar hontadennou⁴. E penn kenta « Fillor an Diaoul » e kaver ive eul lodenn euz ar gontadenn-skwer niverenn 314, « Paotr e vleo alaouret ». Stummou anezo zo anavezet e Europa a-bez, ha pelloh zoken. E kontadennou F. an Uhel ez euz evel just elfennou anezo. E re P. Sébillot, bet dastumet e Breiz-Uhel, e kaver ar stumm anvet « La fille du Diable ». Ar pezh a ra talvoud dezeg an destenn-mañ eo n'on-eus ket klasket he « gwellaad » ; skrivet eo evel e veze kontet e Leskonil. Setu perag e lenner, da skwer : deñ (=dezañ), deu (=dezo), 'neñ (=anezañ), 'neu (=anezo), warneñ (=warnañ).

Trugarez da Andreo Merseur da veza prestet ar haierou deom, da Fañch Postic, euz ar CRBC, ha da Visant ar Floc'h, euz Pornaleg, evid o skoazell.

Gilles Goyat

4. Hans-Jörg Uther, *The types of International Folktales*. Helsinki, 2004.

Eur wech e oa eur pôkêz micherour koadour o chom barz eul loñch plouz e-kreiz eur hoad braz. Daouzeg krouadur e-noa, hag unan all a oa ganet.

Ne oa ket moyen da vade'a 'neñ, rag kavet e oa deñ eur vamm-baeron, med den ne oa kontant da veza tad-paeron.

Ar hoadour hag e wreg a oe kouillon pa zigouezas diraze eun aotrou braz, eur mell tok lINTR war e benn, eur vantell zu war e gein hag eun otou hir war e ziouharr. Daoulagad lemm hag eur mell fri kamm e-noa, med sichant e oa.

« Boñjour deoh, a lavaras-eñ, en eur denna e dok, gwir eo ne gavit ket tad-paeron ebed d'ho paotr bihan ?

- Siwaz, re wir ! » a respontas ar hoadour.

« Na rit ket bil ! » a respontas an estrañjour, « Me zo deut d'ho sikour. Me zo kontant da veza tad-paeron d'ar paotr bihan; mad en em glevom, me ' baeo ar friko bihan, neuze an *dragées*. Kemered a rit ahanon ?

- A galon vad ! » a respontas an den hag e vaouez asamblez gand plijadur.

D'ar zul war-lerh e oe ar vadiziant ; ar hleier a vrallas e-pad eun hanter- eur e iliz ar vorh. 'Barz an ti-plouz ne vankas ket friko. Deg diazez d'an nebeuta, gwelloh an eil evid egile, a deuas war an daol, tra-walh da leunia hanter-kant kov. Ar beorien maget gand youd kerh ha soubenn rouz a 'n em regalas. Ar gwin ruz hag ar gwin gwenn ne vai'ent ket ive. Setu ma oa an dud etre daou ha sichant ken ha ken.

E penn an daol, kost' ar prenest, an tad-paeron a zebras hag a evas e-giz ar re all. Kontet e-noa memez traou drol da hoarzin. Tro pemp eur e oa êt kuit, goude e-noa paeet toud an dispign gand peziou aour.

« Kenavo », a lavaras-eñ, en eur vond kuit, « ne deuin ket aliez da weled ma fillor peogwir emañ o chom re bell deuz amañ. C'hwi a lavaro deñ dond beteg ma zi pa 'no daouzeg vloaz.

- Mad-tre, Aotrou, lavaret e vo deñ, mez penaoz kavoud ho ti ?

- Dal ! Kemerit ar voul-aour-se, 'benn daouzeg vloaz, dres, hi a 'n em lako en hent dohouti heh-unan, ma fillor n'e-no ken nemed mond war he lerh. Ar voul aour a areto dirag ma zi.

- Mad-tre, mad-tre, a lavaras ar micherour, en eur starda eun dorn d'an aotrou braz. Kenavo ! »

Ar paotr bihan a « brofite » mad. Med drôl e kave 'blamour da berag ne wele ket morse e dad-paeron, kaoz e vreudeur hag e hoarezed o-doa eur wech an amzer eun dra bennag gand o re. Eun devez, eñ a houlas gand e dad :

«'Blamour da betra ma zad-baeron 'deu ket morse da weled ahanon 'neñ ?

- Re bell 'ni 'ma o chom, ma mabig », a respontas e dad, « mez eun aotrou pinvidig eo. Pa 'to daouzeg vloaz e vi resevet gantañ ; aour e-neus leun e chakotou. »

Setu ar paotr, en eur zikour e dad da gordenna keuneud, a zoñje 'barz e dad-paeron.

Pa 'n-oa bet daouzeg vloaz, e vamm 'doa fardet deñ eur bern kouign 'vid mond kuit. Ar voul aour, an devez merket, 'noa en em laket da ruill deuz riz ar gwele kloz war ar bank, goude-ze war al leur-zi, ha mond a ree er-mêz bour an nor vraz, ar paotr d'he heul.

'Barz ar fin, n'anaveze ket mui ar vro hag ar voul a yee atao gand he hent. « Da behel 'gaso ahanon ? »

En eur baseal 'barz eun draouenn, me 'welas eur vaouez kouz, torret etre daou, o sortial deuz eur feunteun.

« Paour-kêz kroedur ! » a lavaras-hi din, « Da beleh 'maout o vond e-giz-se ? N'ouzez ket la out degoue'et war an douar daonet ?

- Nann ! Mamm-gouz, me a respontas. O vond da weled ma zad-paeron a zo o chom dre amañ emañ.

- Na yez ket hirroh, ma niz, ma faot dit chom beo. Deuz al leh 'maout o vond, den n'eo ket deut morse d'ar gêr.

- An dra-ze ne ra ket tra, mond a ran memestra.

- Kemer kouraj neuze, ma mabig paoul, ha dalh soñj deuz ar pezh a lavaran dit : Grez atao ar hontrol d'ar pezh a vo lavaret dit.

- Mad-tre, Mamm-gouz, sentet ' vo deuzoutoh. Kenavo !

- Chañs vad dit ! Doue ' vennigo ! »

Ar voul a ruille war-raog atao. Skuiz-dall e oan ha kuignenn ebed ne chome ket mui.

« 'Mechañs n'emaom ket mui pell », a zoñjen. Dres en amzer-ze ar voul-aour ' aretas dirag eur mell dor sarret. Me 'skoeas aliez evid netra. 'Barz ar fin me 'remerkas eur maill-dor 'kichenn ar potaill. Me 'sklapas 'neñ ar starta 'oan kap deuz an nor-houarn. « Baoum » hag an nor a zigoras dioustu. Mez a-boan 'm-oa treuzet an digor, daou mell ki-bleiz, postet a beb tu d'an nor, a lammas warnon en eur chalpa war bouez o fenn. Spontet 'oan gante. Mez koueza a reent fur war an douar pa welent ar voul-aour dirazon.

Eun tammig pelloh 'oa eun nor bronz brasoh c'hoaz evid an hini genta. Me a begas ba 'r boled a oa evid kemenn ar vistri ha stokas 'neñ rust doh an nor. Eun tenn kanol ne ra ket muioh a drouz. An nor vraz a zigoras dre an daou du, mez daou mell ki fero a lammas da zistruj ahanon, paneve ar voul-aour 'noa trañsfurmet 'neu doñv 'giz deñved.

'Benn an deir gwech, ar voul a zigasas ahanon dirag eur hastell braz hag a bignas ar skalier-mein da vond e-barz. Kerkent e oen en eur gegin : eur vaouez vil, lunidou war he fri krog, a oa oh ober stamm 'barz eur gador-vreh, en eur gonta kaoz d'eun den braz en e zao 'dreñv an daol 'kichenn an arbel

tach. An hini gouz 'noa ket gwelet ahanon o tond, mez an den 'noa anave'et ahanon dioustu.

« Ma fillor, te 'oa deut da wel' da dad-paeron ?

- Ya.

- Te ' drefe be' gwall skuiz o tond deuz ker pell-se, azez 'ta !

- N'on ket re skuiz », a responten deñ pa teuas soñj din deuz erbed ar vamm-gouz.

- Chom en da zao, neuze !

- Me 'gav gwelloc'h aze'a.

- Te ' drefe kaoud naon. Kemer eun tamm bara.

- Ma Doue ! 'M-eus ket re naon.

- Chom heb dibri neuze !

- Koulskoude e yafe ganin eun tamm bara.

- 'Teus ket e'mm eur werennad dour ? Te 'teus sehed kazi sur.

- Nann, 'm-eus ket sehed.

- Na evez ket, neuze !

- Koulskoude eur bannig dour ne ra ket droug da zen ebed » me ' lavaras 'n eur en em zelvicha.

An hini gouz, neb distag deuz he stamm, a lavaras en eur zell' deuzouton bour dreist he lunidou :

« Da fillor zo eur paotr fin.

- Ya », ' lavaras ma zad-paeron, « mez eñ a ra toud ar hon-trol ».

Debret koan, e oe dao din mond da gousked 'barz ar harrdi, 'tousez ar fagod hag ar foenn. Me ' zoñje la mi' kousket dioustu ken skuiz e oan, mez ne oen ket evid renoz eur munut, kement a hwenn a bege ba' ennon. Kentoc'h evid chom da ve' debret, me 'yeas er-mêz deuz ar harrdi, ha da hourve' e korn ar leur. Tro hanter-nnoz e oe eun tangwall barz ar harrdi. Ar c'hwenn 'noe saveteet ahanon. Estonet e oe ar mestr en eur weled ahanon d'ar mintin.

« Kousket mad 'teus ? » a lavaras din ma zad-paeron.

« Mad-tre », me a respontas, mez mad 'peus greet lakad an tan e-barz ar harrdi, leun a hwenn e oa.

- Te ' oa divun pa eo peget an tan ?

- Ne oan ket evid serra eur lagad gand ar c'hwenn. 'Vid eur wech 'deus greet vad din, peogwir 'deus tennet ahanon deuz ar maro.

- A-walh, ma fillor ! Koll amzer a reom bremañ. Poent mond d'al labour. Da genta e vo dao deoh skarza al lenn hag arad ar strad a-raog an noz. Dal ! Eur paner distradet evid ober al labour-se ; 'n em zebrouill ! »

Ha me kuit beteg al lenn, tennet ma chupenn ha prest da lakaad ma zonn. Mez kaer 'm-oa ploñj ar paner toull ba' 'l lenn, beradenn dour ebed ne deue ket ganin. Setu me 'koll kouraj hag en em astenn war ar geot da gousked.

Tro kreisteiz ar vatez 'deuas da zigas din merenn : eun tamm bara heiz ker kaled 'giz eur mên.

« 'Teus ket greet muioh labour evid an dra-ze ? » a lavarashi din.

« Nann ! Penaoz ' mije hallet skarza ar lenn ga'r paner distradet a zo groet din.

- Na rez ket bil, paotr, deus da lakad da benn war me barlenn. Ma a glasko dit al laou 'teus trapet en noz-mañ ba'r harrdi. »

Pa oan kousket er stad-se, ar vatez a lavaras :

« Dizehet e vo al lenn,

Ha labouret penn-da-benn. »

Hag hi a yeas kuit, ar mirakl degoueet.

Pa zivunen, an heol a oa o vond da gousked. N'anavezen ket mui war an taol ar vro, ker buan trañsfeurmet. Kontant koulskoude da weled al labour echuet, me 'deuas d'ar hastell. Ma zad-pareon a houlas ganin 'n eur vousc'hoarzin :

« Ma fillor, deut oh a-benn deuz ho krogad ?

- Deut on a-benn », me 'respontas. « Al lenn zo dizehet hag ar font zo aret. Kontant oh bremañ, emichañs.

- Ni a welo 'benn arhoaz » a lavaraseñ gand malis.

Antronoz vintin eñ a roas din eur vouhal plomb hag eun heskenn stên, en eur lared din : « Hirio te 'droho toud gwez ar

hoad braz, te 'gordenno ar skourriou, ha te a zigaso toud war al leur a-raog an noz. D'al labour ! »

Ha setu me kuit d'ar hoad braz. Ar chupenn en traoñ, eun troñs ba'r mañcheier, me 'zihastas eur mell taol bouhal gand ar we'enn genta. A-boan ma ziskrohennen ar we'enn, ma bouhal blomb a wagaas, ne dale mui netra 'nei. Gwelom an heskenn bremañ ; pa 'm-oa grêt mond-dond ganti war ar we'enn e oa êt tro enni. Koulz mond da gousked 'giz labourad gand oustillou ker fall. Ha me mond da hourveza 'giz an devez a-raog.

Tro kreisteiz ar vatez a deuas gand merenn hag a lavaras din :

« 'Teus ket greet netra 'bed c'hoaz, pôkêz pôtr !

- Penaoz e-mije greet muioh, dimezell ? » me ' respontas :

« An heskenn hag ar vouhal a zo groet din zo mazaoutet.

- Gwir eo », a lavaras-hi. « Debr da verenn, ha deus c'hoaz da lakad da benn war ma barlenn. Marteze e chom laou ganit c'hoaz. »

Pa oan kousket er stad-se, ar vatez a lavaras :

« Me 'c'hoantas

La ar gwe 've pilet,

Ar skourriou kordennet,

Ar souch er-mêz tennet,

Hag a toud ba' leur ar hastell kaset. »

Hag hi 'yee kuit, eur mirakl 'neve groet.

Me 'oe en-dro estonet, 'n eur zivuni, ne welen gwe'enn 'bed mui dirazon.

'N eur erruoud ba'r hastell, ma zad-paeron a houlas ganin gand goap :

« Hag hirio, ma fillor, penaoz 'peus grêt ? Kerkoulz 'giz deh ?

- Mad-tre, Tad-Paeron, sellit deuz ar bern fagod a bign beteg ar houmoul, hag ar heuneud krennet, *de quoi* farda eun tan ivern 'pad deg vloaz. Ar wech-mañ oh kontant, 'michañs.

- Ni a welo 'benn arhoaz » a lavaras-eñ gand imor fall. E wreg a hroumenne 'tre he dent :

« Henne 'teuio a-benn deuzoutoh, ma den ! »

An drede devez, ma zad-paeron a lavaras din gand our-gouill : « Gwel' a rez an neiz-pik a zo e-lae d'an tour gwer. Daouzeg vi zo e-barz. Digas 'neu din a-raog an noz vi' farda eun alumenn da goan. D'al labour ! »

Me ' bignas er gwe 'giz eur haz, mez an tour gwer 'oa ledan ha lampr ; kaer 'm-oa starda ma diouharr ha ma divisker, me ' riske en traoñ bewech. Goude eur hard-eur esa, me 'largas an tour ha 'yeas da gousked war an tirienn.

Tro kreisteiz, ar vatez a deuas gand ma merenn.

« Petra 'peus d'ober hirio ? » a houlas-hi ganin.

– Mond da gerhad ar viou e-lae an tour gwer » me 'respon-tas.

– Neuze unan deuzoutom 'rank be' la'et ar wech-mañ.

– Me 've koulz kontant na ve ket me.

– Neuze 'vo me » a lavaras-hi. « Te a ray bervi ma horf 'pad div eur 'barz ar pod-houarn braz leun a zour. Te 'denno neuze an eskern hag a varho 'neu an eil war-lerh egile war an tour gwer 'n eur bignal, 'giz war eur skeul. Te 'drapo ar viou, mez na zizoñjez ket 'n eur ziskenn da gemer toud an eskern. Te 'vanno 'neu ba'r pod-houarn, ha me 'teuio beo en-dro. 'Mout prest ?

– Me 'm-eus true deuzoutoh.

– 'M-eus ket amzer da goll, kemer kouraj ! »

Me distaga eun taol bouhal ga'r vatez 'kreiz an tal, ha div eur war-lerh, me ' bigne 'lae an tour, en eur ober e-giz 'doa lavaret din. An eskern beo a stagas mad doh an tour gwer. Daouzeg vi oa dres ba 'r neiz-pik. Me a lakaas 'neu e ma boned hag a ziskennas ker kontant ken na zizoñjen kemer an askorn uhella, a oa bez bihan an troad kleiz.

Krena a reen gand an aon da nompaz be' kad da zigas 'nei beo, dre faot ma divemor, mez prezen 'moe bannet toud an eskern ba 'r pod-houarn, an dimezell kaloneg a deuas er-mêz beo-beug. Seulamant kousket e santas bez bihan he zroad kleiz. 'Benn 'doa dornatet 'neñ, hi 'gavas 'neñ gwag.

« Me 'bari 'teus dizoñjet diskenn tamm askorn ma bez bihan » a lavarar-hi din, « mez an dra-ze ne ra ket forz a dra. »

Me a gasas ar viou pik d'ar hastell. Ma zad-paeron ne oe ket evid kuzad e hlahar.

« Finnoh out 'vid ma zoñje din » a lavarar-eñ 'n eur skri-gnal.

Lesk' a ree ahanon trankil goude-ze. A-wechou memez 'noa an azvan da garoud ahanon.

Eun devez, marteze 'm-oa neuze tost ugent vloaz, eñ dond da gennig din unan deuz merhed ar maner da zimezi. « Kemer an hini a blij dit ! »

Kerkent e oe galvet eiz plah yaouank war 'l leur. Ar vatez 'oa war he dillad bemde, mez e zimezelled 'oa fichet ha froned.

Me 'fote din choaz ar vatez, mez evid nompaz chifa ma zad-paeron 'kreiz e zaoulagad, me a lavarar deñ :

« Toud a blijont din, kement an eil hag eben. Kuzit din ma daoulagad, 'giz evid c'hoari mouchig-dall, me 'ra toud ar hon-trol deuz an dud all, me ' dibabo ma gwreg dre he zreid. Mar plij, lavarit deu tenna o botou-ler. »

C'hoarzagadeg a oe dre-berz ma mennoz. War ma grapousounou, me a darlatas toud an treid, beteg 'm-oa santet bez bihan gwag ar vatez.

« Ma 'n em drompan, tampir eviton, a lavaren neuze, ar plah yaouank-mañ vo ma gwreg. »

Ma zad-paeron 'oa e araj ru. D'ar hastell e yeas gand e verhed, goude 'noe lavaret deom : « C'hwi a yelo ho-taou da gousked ba' grignol loñch ar marh. »

Ma gwreg a lavarar din pa oem on-unan : « N'eus ket amzer da goll amañ, ma ne faot ket deom mervel. Da dad-paeron eo an Diaoul. Daou varh e-neus. An hini gwenn a red ker buan 'giz an avel, mez eur penn karn e-neus. Ma ne blij ket deñ senti, n'eus netra 'bed d'ober gantañ. An hini du zo sentuz, kaloneg-mat, mez ne haloup ket ker buan 'neñ, war bouez pell. Tro han-ternoz, pa vo kousket toud an dud, ni 'n em achapo. »

Ar marh gwenn pa oam êt da glask kaoud 'neñ ne ree ket van 'neñ, preg brao deuzoutañ pe folla 'neñ. Dao e oe deom kemer al loen du. Hemañ a drohas kuit dioustu, ni on-daou war e gein. Gouzoud a reem la vefem bet klasket pa vefe deut ar mintin, setu ni a bourchue mond war-raog da hortoz.

Pa oa deut ar sklêrijenn, ma gwreg a houlas ganin :

« Ne welez ket tra 'dreñv da gein o tond war-lerh deom ?

– Nann, a responten, ne welan ket tra. »

Eun tammig goude-ze, hi a houlas adarre :

« Ha bremañ, ne welez ket tra c'hoaz ?

– Eo, me 'wel eur mell bouillard du o tostaad buan.

– Hennez eo an Diaoul. Emaon o vond da chigarda 'neñ eun tammig. » Hag hi banna war he lerh he dirosterez¹, 'n eur lavared :

– « Me 'fot din la ma grib 'teufe eur gleud uhel, barigner stank dei, 'giz dent an dirosterez. »

Ar bouillard du a aretas hag a reas tro evid paseal. Amzer on-noa bet da dreuza eur mêjou braz pa, en eur zistroi, 'welen ar goumoulenn zu o tostaad en-dro. Ma gwreg a vannas neuze he broust bleo war he lerh en eur lavared :

« Te 'vo eur mell koad, ker stank ar gwe ennañ 'giz ar ar reun er broust-mañ. »

An Diaoul a gollas adarre eur bern amzer evid ober tro, hag ar marh du a fuste war-raog atao.

Mez heb dale ar marh gwenn a dostaas deuzoutom en-dro. Kichenn be' trapet e oem. Ma gwreg a lavaras neuze :

« Me 'vo eun iliz 'bord an hent. Te 'vo eur person o lavared an overenn. »

Kerkent e oe an Diaoul dirazom :

« Aotrou Person, 'peus ket gwelet eun den hag eur vaouez war eur marh du o paseal amañ ? » a houlas-eñ.

« *Ora pro nobis* », me a ganas.

1. Dirouestlerez.

« N'eo ket an dra-he emañ o houl'. 'Peus ket gwelet eun itron hag eun aotrou war eur marh du o paseal amañ ?

– *Miserere nobis.*

– Bou'ar oh, Aotrou Person. Me 'houl ganeoh hag-eñ 'peus ket gwelet eun den hag eur vaouez o paseal amañ war eur marh du.

– *Amen-en-en !*

– Ki droch eo ar person-mañ » a lavaras an Diaoul. « 'Dalv ket din mond pelloh. » Hag eñ 'deuas war e giz d'ar hastell. Ni a drohas war-raog ar buhanna ma oa kad ar marh du.

An Diaoul oa bet follet gand an Diaoulez pa teuas d'ar gêr.

« 'Teus ket trapet 'neu ? » a hopas. « Goulet 'teus seulamant gand tud 'teus gwelet hag-eñ 'oa paseet ?

– Maouez paoul », a respontas an Diaoul, « tarlatet on hirio ka'i sur. War ma hent 'm-eus gwelet da genta eur gleud uhel, goude-ze eur hoad braz deut er-mêz deuz an douar en noz-mañ. Pelloh e oa eun iliz, ha pa 'm-eus goulet gand ar person hag-eñ 'noa ket gwelet tra 'bed war an hent, eñ 'neus respontet ahanon e latin.

– Genaoueg ! An iliz hag ar person a oa int ! Drefez be' kemeret 'neu !

– Mad-tre, mad-tre ! 'Maon o vond en-dro, kad on da drapa 'neu c'hoaz. »

Hag eñ kuit en-dro e-giz eul luyadenn.

« 'Ma an Diaoul o tond adarre war-lerh ni » a lavaren da ma gwreg nebeud amzer goude-ze.

Tostaad a ree buan.

« Ar wech-mañ me 'vo eur we'enn kerez, te 'vo o tastum eur panerad. »

Kerkent e oe an Diaoul dirazom.

« Lavar din, jardinour, 'teus ket gwelet eun den hag eur vaouez o paseal amañ war gein eur marh du ?

– Eo, o tastum 'neu e oan ba 'r paner du.

– N'eo ket an dra-ze emañ o houl', selaou ! 'Teus ket gwelet eun den hag eur vaouez o paseal amañ war gein eur marh du ?

- Kontant oh da dañva 'neu ? Ma karit ' vo groet deoh eun dornad.

- Mez selaou mad 'ta, azen, 'teus ket gwelet eun den hag eur vaouez o paseal amañ war gein eur marh du ?

- Gwir eo, n'int ket gwall aho 'neu c'hoaz.

- Mil gurun ! Sakre Diaoul, ne glevin netra vad 'bed gand an den droch-se. Deom d'ar gêr ! »

Ha ni a grava war-raog atao. Deut an Diaoul e kêr heb tra 'bed, e vaouez a repech deñ e sotoniou.

« 'M-eus ket gwelet ar person ar wech-mañ », a lavar-eñ. « Pelloh e oa eur jardinour o tastum kerez. Hanter-zod e oa sur ; pa 'm-eus goulet digantañ hag-eñ 'noa ket gwel' netra 'neñ war an hent, eñ ' respontas ahanon gand komzou dibenn.

- Te 'ni zo sod ; int a oa ar re-ze c'hoaz.

- Mad ! Mad ! 'Maon o vond kuit en-dro.

- N'emaout ket ! Me a yal' ma-unan ar wech-mañ. Me 'drapo 'neñ. Lesk ar marh gwenn ganin. »

Ma gwreg ha me a bourchuas mond war-raog. En eun taol e teuas an neñv du-pok dreñv ma hein. Eur bouillard kalz teñvaloh 'vid ar gwechou all a oa o tostaad buan deuzoutom.

« An Diaoulez 'ni eo ar wech-mañ ! » a lavaras ma gwreg. « Me 'm-eus deg gwech muioh aon dirazi 'vid dirag an Diaoul. Hi zo fin, n'eo ket êz trompa 'nei. Me vo an taol-mañ eun houadez war ar poull, ha te vo eun houad. Divina a ray an drogamm. Te a dostado deuz ar bord pa halvo ahanout, mez paz re dost, ha pa zoubou da bega en da lost, te a bloñjo trumm 'vid lakaad 'nei da goue'a. Intentet 'teus ?

- Me ' ray 'giz 'peus lavaret. »

A-boan prest an traou ganeom, ar marh gwenn 'aretas krenn 'kost' ar poull.

« Kani, kani, kani, kani, kani, kani » a lavaras an Diaoulez evid lakaad da druch en eur ober van da vruzuni bara en dour. Me a dostadas deuz ar bord en eur daol evez, ha pa an Diaoulez a zoubas da grogi ba' ma lost, me a bloñjas buan. Koue'a a

reas ba' 'l lenn. Kaer 'noe en em zifreta, nebeud amzer goude-ze e oe beu'et.

Gwell a-ze. « Bremañ 'maom saveteet », a zoñje deom, en eur bignal eur wech muioh war gein ar marh du hag en eur lakad 'neñ da vond d'an daoulamm. Padal ne oa ket echuet an tourmant c'hoaz. Peogwir ar marh gwenn heb e vestrez e-noa grêt tro deuzoutañ e-unan, hag an Diaoul pa noa gwelet 'neñ e kêr e-noa divinet la eur maleur a oa c'hoarvezet gand e vaouez.

En araj ru, eñ a yeas en hent en-dro, desidet da drap' ahanom, forz pe briz.

Setu e oem estonet on-daou pa 'noa gwelet sevel adarre dreñv or hein eur mell bouillard du gand luyed.

Hag echuet 'noa ma gwreg he zroiou kamm. Dre voneur, e welem dirazom ar piler a verke fin an douar daonet. Stouet war goug al loen, ma gwreg a yudas :

« Ya, ma marh ! Ya, ya atao !

- Diwallit 'veh lazet ! » a vlejas an Diaoul en eur dostaad buan deuzoutom. « 'Maoh din ! »

Ki-aon am-oa. « Trapa a raim a-bred a-walh an douar santel ? »

Dres pa oa ar marh du, skuiz-dall, o lamma dreist ar wez²-harz, an Diaoul kernou hir a grogas e lost al loenig paoul en eur c'hoarzin e-giz unan zod. Chom a reas al lost en e zorn, mez ni a oe saveteet.

Ma gwreg 'noa grêt sevel eur mell ti nevez e-kreiz ar vorh kenta 'noa gwelet : ostel hag ostaliri. Me goul' diganti hag-eñ oa kontant e ven êt da gas kelou da ma zud.

« Kerz », a lavare-hi din, « mez 'leskit ket den 'bed da voucha dit, metran 'zizoñji toud ar pez zo paseet.

- ' Rit ket bil, grêt e vo hervez ho c'hoant. »

Kontant 'oan da weled ma zud goude eur gasadenn ker tenn zo. Ma zad a stardas din eun dorn stard ; ma mamm ' oa

2. ar waz.

o vond da voucha din. Me a zalhas 'nei dre gaerig en eur lavared dei :

« N'eus ket droad da voucha din, Mamm ; me zo re skuiz, mi' ket hallet mond da gousked eun tammig ?

- Tavada³, ma mabig ! Kerz er penn nevez, den ne zirengo ket ahanout aze. »

Kelou ma distro e-noe grêt hent buan, hag heb dale 'teuas d'an ti kerent hag amezeien.

« Deut eo ar paotr d'ar gêr ?

- Ya, 'lavaras ma mamm, mez kousket eo.

- Moyen zo da wel' neñ ? » 'laras ma mamm-baeron.

- Ya, mez na zivunit ket 'neñ, gwall skuiz eo, ha na vouchit ket deñ, divennet e-neus.

- Kemeñt-he, e vamm-bareon 'neus droad da voucha deñ ! » a lavaras homañ, hag hi oh antreal barz ar penn nevez war bigou he zreid, hag o lakaad eur mell bouch trouz war ma zal.

Pa zivunas fillor an Diaoul diwe'toh, 'noa ket soñj mui deuz netra, na deuz kastell an Diaoul, na deuz e wreg. Pa e vignoned 'houle gantañ e peleh e oa bet ker pell-se, eñ a responte : « Deh e oan bet o kordenna keuneud gand ma zad, ha disul diwe' e oan bet er vorh o hoari galoch ganeoh. » E gamaladed a gavas la 'oa deut skoachig pe droch.

Ne breger ket mui e kêr nemed deuz an ti nevez savet e-pad an noz, ha neuze deuz ar vouillez ostizez.

Fillor an Diaoul ha daou deuz e vignoned a yee d'ar zadorn d'abardae da hoari eur bartied kartou ha d'eva eur chopinad gwin gwenn ba' 'n ti nevez. Ar vestrez 'noa divinet la oa bouchet deuz he gwaz. Selled a ree deuz ar c'hoari en eur brometi d'an hini 'ni' gouneet eur goan gaer 'vid netra hag an hanter deuz he gwele. Nag an tri pôtr yaouank a dôle evez evid gouniz. Fillor an Diaoul 'noa kollet peogwir ar re all a vie aliez o c'hoari kartou, e-pad eñ 'oa e ti e dad-paeron.

3. Te 'oar 'walh 'ta.

Fier e oa an hini 'noa gouneet, lopi a reas e goan vad gand plijadur, ha pignal a reas goude-ze ba' kambr vrao an itron kousket dija.

Pa oe war gorr e roched, ar vestrez a lavaras deñ :

« Sarrit, mar plij, an ourlabañchou, 'barz dond er gwele.

- Dioustu » a respontas ar pôtr yaouank.

Kerkent en em zoubas er prenestr evid ober an dra. Mez siwaz ! Pa zarre unan, an hini all a zigore. Ouspenn kant gwech 'noa en em gemeret. Ar c'hwezenn pil a zevere warneñ. Ne oe ket kad da zond a-benn deuz e grogad. E-pad an noz e oa chomet berr da zarra an ourlabañchou. Mall e-noa da ve' lesket da vond d'ar gêr.

Tro c'hweh eur d'ar zul vintin, an dud kenta o vond d'an overenn bred 'ni' ket fa'iet ober goap deuzoutañ pa vefe didarlatet. En em wiska a reas gand tiz, ha fusta a reas d'ar gêr adreuz ar parkeier evid nompaz be' gwelet.

Evel-just n'e-noa ket disarret 'neñ dirag e gamaladed. Setu ar zul war-lerh ' zigouezent o zri en ti nevez en-dro.

An itron a ginnigas ar memestra gwin hag ar wech all.

« N'eo ket me 'ni vo trapet an taol-mañ ! » a zoñjas ar paotr trompet. Hag eñ a hoarias ar falla ma oa kad.

Koulskoude, n'eo ket c'hoaz fillor an Diaoul 'ni 'noa gouneet. An eil paotr yaouank 'noa riset 'neñ. Koan vad e-noa bet, mez pa oe dao mond er gwele, ar vestrez a lavaras deñ goude 'noe tennet e chupenn :

« N'eus ket beradenn dour ebed en ti. Kerz, mar plij, da gerhad eur zaillad dour er puñs a-dreñv an ti.

- Ne vin ket pell » ' lavaras ar paotr yaouank en eur redeg d'ar puñs.

Banna a reas ar zaill e-barz, mez pa oe dao hala 'neñ d'al lae gand ar gordenn, ne oa ket kad 'neñ. Pa hale eur gouled⁴, e achape gantañ diou. Kaer 'noe starda e vizied war ar jadenn,

4. gourhed.

dirapa a ree etre e zaouarn.

N'ouzon ket petra e-nije ket grêt 'vid be' lesket kemer e achap ! Beteg ar zao-heol e chomas da vosenni ar zaillad dour-se. 'Barz ar fin, pa 'noa en em zantet dizorsellet, eñ 'drohas d'ar gêr heb e chupenn.

An daou loustig paket 'noa en em renket 'vid lesk' fillor an Diaoul da hounez ar zul da zond. An devez-se int 'doa c'hoariet ker fall ken o-doa kollet o-daou.

An itron vrao a zañse, ker kontant e oa, er memez doare e-giz e oa boezet, a lavare-hi. An daou lampon a frapas gante en eur vousec'hoarzin, o soñjal e peseurt tra zod e vefe laket o hamalad da ober.

Mez ar wech-mañ e oe chañchamant. Ar vestrez a reas eun tammig dour memor da eva da fillor an Diaoul, ha kerkent e teuas soñj deñ deuz toud e amzer dremenet.

« Me 'oar oh ma gwreg », a zisklerias-eñ en eur lammad da he goug, ha me zo mestr amañ.

« 'Barz ar fin e welez sklêr ! » 'lavaras an itron. « Dre voneur 'm-oa diwallet eur veretennad louzou dour memor, a-hend-all e oam trapet fall. Divennet 'moa dit koulskoude boucha da zen.

- Sentet 'm-eus.

- Goud a ran. N'eo ket dre da faot. E-pad ma oas kousket, da vamm-baeron 'neus bouchet dit. Bremañ an dra-ze zo di-zoñjet.

- Ki evuruz on en ho kichenn. »

An devez war-lerh, fillor an Diaoul a ziskeunas⁵ e wreg da e dud ha da e gerent hag e pedas toud ar barrez da e frikou 'barz an ostaleri nevez.

E-pad tri devez ha teir nozvez an dud a zebras, a evas, a zañsas hag a ganas. Ar gwin a zivere deuz ar feunteuniou, moh lard rostet a oa o pourmen war an henchou,

5. a ziskouezas.

« Eur fourchetez hag eur goutell en o rear,
Troh an hini a gar ».

Me 'm-oa neuze pemp pe c'hweh vloa. Mond a yeen 'barz
ar gegin war begou ma zreid, hag e-pad ar geginerez 'noe troet
he hein, me a zoubas ma bez-yod ba' 'r saoz da lipa. Oum ! Pe
blaz vad !

Mez ar geginerez 'noa gwelet ahanon, ha hi distaga ganin
eun taol botez-ler paper e-kreiz ar rear, ha banna ahanon war
ar skabell-mañ, e-leh emaon o konta deoh ar goñchenn-mañ.

Marcel Divanac'h

